



# PRIZIOÙ RANNVROEL DAZONT AR BREZHONEG 2008



## AL LOREIDI

---

### RUMMAD EMBREGEREZHIOÙ

---

#### 3 - Super U Landudeg

Er Vro Vigoudenn Uhel e kaver ur gourmarc'had - un tamm - disheñvel diouzh ar re all, hini Landudeg an hini eo.

E-kichen ar banell Super U, "Bro Vigoudenn Uhel", ez eus bet skrivet gant lizherennoù bras-kenañ war ar gourmarc'had hag an dra-se, evel just, a ro c'hoant d'an dud, brezhonegerien en o zouez, da vont d'ober un tamm tro e diabarzh ar stal.

Petra a vez gwelet en degemerva ? Ur pezh panell skrivet warni "Startijenn ar Vro Vigoudenn" dres e-kichen logo ar vro ha gwir eo n'eo ket ar startijenn a vank. Ur pezh gourmarc'had nevez-flamm eo Super U Landudeg.

Brav eo gwelet evel-se pezhioù panneloù bras skrivet e brezhoneg ha n'eo ket echu pell alese.

Divyezhek eo an holl banelloù a zo e penn rannoù ar stal. Da skouer, tu zo da lenn "Univers bébé – Bed ar babigoù", "Farine – Bleud", "Eau – Dour", "Petit-déjeuner – Lein", "Parfumerie – Parfumerzh"...

Ui labour graet mat panneloù brav hag aes da lenn. Font ha ment al lizherennoù zo par-ha-par en div yezh. Ur skouer da heuliañ eta.

Dre youl an Aotrou Germain Le Dreau a zo e penn Super U Landudeg - Bro Vigoudenn Uhel - eo bet kaset da benn al labour-se, e kenlabour gant an Ofis ha Startijenn ar Vro Vigoudenn.

Gourc'hemennoù deoc'h, Aotrou an Dreau, evit bezañ roet d'ar brezhoneg ar plas a vez dleet dezhañ er Vro Vigoudenn.

#### 2 - Porzh Mirdi Douarnenez

War-raok ez a ar brezhoneg er skolioù, war-raok ez a er strollegezhioù lec'hel ivez met n'eo ket stank en ensavadurioù sevenadurel a gemer yezh ar vro e kont. Porzh-mirdi Douarnenez a zo er penn a-raok war se evit Breizh a-bezh atav. N'eo ket ar brezhoneg ur arouez evit pennoù ar porzh-mirdi nag un digarez kennebeut. Ur gwir breder o deus war implij ar yezh en o framm. Abaoe 2003 ez eus bet kaset da benn oberoù don ha poellek endro d'ar brezhoneg. Diskouezet e vez ar yezh d'an holl da gentañ, da skouer er selaouva « Yezh o mor » a ro an tu da bep hini da glevet ar yezh implijet gant ar voraerien ha micherourezed ar friturioù. Da eil, evit ar vrezhonegerien, yaouank pe koshoc'h ez a pelloc'h rak en o yezh e c'hellont ober tro ar mirdi dre glevheñcherioù pe ouzh ar panneloù a zo hed a-hed ar savadur. Ur yezh implij, par d'ar galleg ha d'ar saozneg eo ar brezhoneg e Porzh-mirdi Douarnenez neuze. Ur yezh implij evit ar weladennerien met ur yezh en implij e mont endro ar framm eo ivez. Brezhonegerez eo Anne Gouerou kenurzhierz ar mirdi hag un elfenn eus karta c'hrafek an aozadur eo ar brezhoneg. A dra sur, en ur labourat war

tachenn glad ar mor, eo sikouret ar yezh gant ar Porzh-mirdi d'en em zispakañ dirak an holl en un doare nevez.

## 1 - Paprika

Paprika – Ti Hungaria a zo ur stal a zo bet digoret e Karaez hag a vez dalc'het gant Katalin Boronkai.

Ur stalig vrav e-lec'h ma vez tu da brenañ a bep seurt traoù o tont eus Hungaria : dilhadoù gant livioù brav, evajoù, produioù artizanel, arrebeuri... Kaer-meurbet eo al lec'h ha plijus-kenañ rak posupl eo, ivez, d'evañ ur banne ha da doullañ kaoz gant Katalin.

E Paprika, Ti Hungaria e Breizh, e c'hall an holl kavout traoù a denn d'ar vro-hont : arz, sevenadur, istor, yezh... Ouzhpenn ur stal eo deuet da vezañ "Paprika" e gwirionez.

« Dispar ! », a vo lavaret gant an holl, « Hungaria a zo ur vro gaer gant ur sevenadur hag ur yezh dibar, brav eo degemer e kreiz-Breizh ur stal a seurt-se met... Peseurt liamm gant ar brezhoneg ? »

A liamm a zo bet graet gant Katalin etre ar brezhoneg, ur yezh keltiek, hag an Hungareg, ur yezh dibar en Europa.

Kroget he deus da zeskiñ brezhoneg en Hungaria e 1991 a-raok kenderc'hel e Breizh gant Skol-veur Roazhon ha gant KEAV, e Skaer.

Komz a ra brezhoneg bremañ, dimezet eo gant ur brezhoneger, reiñ a ra kentelioù brezhoneg evit an oadourien e Karaez gant Spered ar Yezh ha kelenn a ra evit Diwan ivez.

He stal, Paprika, zo divyezhek ha pep tra zo skrivet e brezhoneg. An holl banelloù, an holl diketennoù zo e brezhoneg pe en div yezh. Ar pal lakaet ganti a zo diskouez ez eo posupl d'ober "kenwerzh kant dre gant e brezhoneg" ha war an hent mat emañ evit tizhout ar pal.

Trugarez vras deoc'h, Katalin, evit al liammoù ho peus krouet gant Hungaria, evit ar pezh a rit evit ar brezhoneg. Evurus on o reiñ deoc'h : Kentañ Priz Rannvroel Dazont ar Brezhoneg.



# PRIZIOÙ RANNVROEL DAZONT AR BREZHONEG 2008



## AL LOREIDI

---

### RUMMAD HINIENNOÙ

---

#### 3 - Ahmed Malki

Ahmed Malki evel ma c'haller en divinout diouzh e anv, n'eo ket ganet e Breizh, ne oa ket Breizhad a orin zoken. Nann, Aljerian eo Ahmed Malki, ur Berber eus Kabilia, hag eno en deus bevet betek 1992. Graet studioù war an ijinerezh tredan e Bro-C'hall gantañ, labourer en deus Ahmed Malki evit un embregerezh fardañ dafar-mezegel. Dimeziñ a ra gant ur Vretonez hag e 2005 e krog da zeskiñ brezhoneg evit abegoù micherel pa ziviz mont da gelenn teknologiezh e skolaj Diwan Bro-Dreger en distro-skol 2004. Abaoe en deus heuliet Ahmed Malki kentelioù-noz gant ar gevredigezh Skol an Emsav e Roazhon ha meur a staj en deus graet da-heul gant Kalon Plouha ha dre Studi ha Dudi e-pad daou vloaz. Teiryezhek eo Ahmed a-vihanik rak ouzhpenn e yezh-vamm, ar berbereg, en deus desket arabeg ha galleg en ur skol divyezhek en e vro. Hag-eñ Kabil, kizidik eo Ahmed Malki ouzh saviad ar minorelezhioù; desachet eo gant spered Diwan hag e stourm evit kelenn ar brezhoneg. Da-heul ur bloavezhriad hanter deskiñ ar yezh, gouest eo Ahmed da gelenn e zanvez skol dre ar brezhoneg bremañ hag, en desped d'ar pezh a glever, testeniekaat a ra n'eo ket diaes deskiñ ur yezh nevez d'an oad gour. Ezel eo Ahmed eus kevredigezh sevenadurel Berbered Breizh ha mennet eo da sevel ur raktres eskemm etre yaouankizoù Kabilia ha skolaj Diwan Plijidi dre ma kav dezhañ ez eus poentoù boutin en hon daou sevenadur. A-benn ar fin, kroget en doa Ahmed da zeskiñ brezhoneg evit abegoù micherel-rik ha tamm-ha-tamm eo bet dedennet gant holl zoareoù sevenadur Breizh. Bremañ eo laouen o komz brezhoneg ha fier-ruz d'ober gant ar yezh evit eskemm gant mamm-gozh e wreg.

#### 2 - Maina Guillou

Ur plac'h yaouank eo Maina Guillou ha pell zo dija e oa savet c'hoant enni da zeskiñ brezhoneg. Krog e oa er skolaj hag el lise met chomet e oa war he c'hoant d'ar c'houlz-se ha divizet he doa mont pelloc'h daou vloaz zo pa oa aet gant stummadur hir an UCO e Gwengamp gant ar pal bezañ brezhonegerezh da vat. Edukatourez evit ar re vihan eo diouzh he micher ha goude bezañ prenet un tamm skiant e Kreizenn Departamant ar Vugaleaj ma labour ur bloavezh-pad e fell dezhi kas da benn ar raktres a zo ganti abaoe pell : labourat gant ar re vihan e brezhoneg. Tennañ a ra splot eus he stummadur war ar brezhoneg evit ober stajoù liammet gant ar vicher-mañ. E-kerzh he staj gant Kreizenn Sevenadurel Lannuon e sav un enklask da briziañ ha dedennet e vefe tud ar vro gant ur vagouri vrezhonek. Berzh a ra an enklask, forzhig tud e Treger a garfe lakaat o bugale en ur vagouri a seurt-se. D'ar mare ma achu he stummadur war ar brezhoneg e klask Ti-poupigoù Bear ur renerez. Mont a ra Maina war ar renk o kinnig he barregezhioù hag he raktres d'ar bodad-barn. Un nebeud mizioù goude e tislep ar renerez nevez he raktres d'ar skipailh tud a-vicher ha da gevredigezh tud ar boupiged. Berzh a ra en-dro. Ur miz war-lerc'h e sin

magouri Bear karta Divskouarn. Bez' ez eo Ti-poupigoù ar vagouri divyezhek kentañ en Aodoù-an-Arvor.

## 1 - Yannig Guillanton

Ijinour eo Yannig Guillanton. Brezhoneg en doa kroget da zeskiñ pa oa o vevañ e Pariz da gentañ, ma kinnigas an danvez-mañ da-geñver e vachelouriezh. Goude-se e kendalc'has da zeskiñ e yezh dre lizher gant Skol Ober. Distro da Vreizh, en em staliañ a ra e Naoned ma heuilh kentelioù gant Pêr Pondaven dre ar gevredigezh Kentelioù an Noz. Desket ar yezh gantañ, komz a ra brezhoneg er gêr gant e vugale. Dibabet gantañ skoliata e dri bugel e skol Diwan Naoned, Yannig Guillanton a gemer perzh kalz er gevredigezh en departamant-se. E fin ar bloavezhioù 90 e oa bet ur raktres evir sevel ur skolaj Diwan kentañ el Liger-Atlantel met aet e oa da get pa oa bet torret enframmadur Diwan en deskadurezh Stad e 2001. Gant tud all e tiviz Yannig Guillanton adkemer an teul diwar diazezoù nevez. En em harpañ a ra war skouer raktres skolaj Diwan Bro-Dreger hag ar gevredigezh Studi-ha-dudi a ro bod d'ar skolaj Diwan eno. Bremañ emañ Yannig Guillanton e penn ar gevredigezh "ur skolaj Diwan el Liger-Atlantel" hag e-karg emañ eus bodad arc'hantaouiñ ar skolaj, ha n'eo ket ar bodad aesañ evel ma c'haller soñjal. Dre m'eo berr an arc'hant gant Diwan Breizh atav e oa ret d'ar gevredigezh prouiñ e oa kalz a dud a-dreñv d'ar raktres ha ne vefe ket lakaet Diwan Breizh en arvar diwar savidigezh ar raktres-mañ. Dindan 18 miz ez eus bet bodet 100 a dud o deus asantet paeañ un dreuzvankadenn vizek evit ar raktres skolaj, ar pezh a dalvez kement ha 22000 € ar bloaz, da lavaret eo muioc'h eget an holl skoloù Diwan zo bremañ bodet asambles. Kalz a nerzh hag a amzer en deus lakaet Yannig Guillanton hag e skipailh evit kendrec'hiñ an dud eus mad o raktres. N'eo ket bet difrouezh e labour pa voe divizet gant emvod-meur Diwan diwezhañ digeriñ ar skolaj a-benn an distro-skol a zeu. Un arouez hag ur c'hammed a-bouez evit amzer da zont ar brezhoneg el Liger-Atlantel eo, un araokadenn deuet a-drugarez da labour sirius ha pennek tud evel Yannig Guillanton.



# PRIZIOÙ RANNVROEL DAZONT AR BREZHONEG 2008



## AL LOREIDI

---

### RUMMAD KEVREDIGEZHIOÙ

---

#### 3 - Bremaik

Bep sizhun, e kinnig Bremaik keleier digoust dre Internet war danvezioù a-bep seurt. Tri bloaz zo e oa bet savet al lec'hienn gant ur skipailhad pemp den yaouank a youl-vat a gave dezho e oa re nebeud a zanvez kelaouiñ ha dudi war ar Genrouedad. Seizh rubrikenn a gaver war Bremaik : darvoud ar sizhun, endro, arzoù, sport, sinema, sonerezh pe levrioù hag ar vuhez pemdez. Da Sul e vez savet ar pennadoù ha da Lun e vezont lakaet enlinenn gant Milio Latimier. Pep hini eus ar pemp den a sav ar pennadoù a c'hall bezañ erlerc'hiet gant un den bennak all e ken kaz ne vijent ket gouest da sevel o fennad evit abeg pe abeg. C'hwennet ha stummet eo ar pennadoù gant Milio Latimier a glask skeudennoù evito ivez. Pennadoù berr a ginnig Bremaik evit an dud n'o deus ket kalz amzer da lenn pe a zesk brezhoneg er c'hentelioù-nnoz pe er skolajoù. Priziet-bras eo o fennadoù dudius a blij d'ar re yaouank gant ar gelennerien eil derez. Etre 3000 ha 4000 a dud a zarempred lec'hienn Bremaik bep miz, ar pezh n'eo ket dister evit ul lec'hienn e brezhoneg nemetken. En ur ober tri bloaz n'eus ket bet gwech ebet troc'h ebet ha bep sizhun ez eus bet kinniget pennadoù nevez. Bremañ e fell d'an dud a ra war-dro Bremaik lakaat o lec'hienn da vezañ anavezet muioc'h ha gwellaat c'hoazh an doare m'eo kinniget al lec'hienn.

#### 2 - Les Tontons Yoyo

Ur gevredigezh a vod daou gomper sot gant arz ar glouned eo "Les tontons Yoyos". Gwiskañ a reont dilhad anavezet mat ar C'hloun gwenn hag Aogust. C'hoari a reont klounerezhioù klasel ar sirk. Fellout a ra dezho treuzkas hêrezh bloavezhioù Alex ha Francini war pistenn ar stered m'eo ar c'hoarzh un ober ret ha plijadurus a-berzh ar vugale en oad tenerañ. E penn-kentañ ne rae an Tontons Yoyo nemet sketchoù gallek. Ur wech ma oant o c'hoari en un ti retredidi e Klegereg avat, un tamm dre zegouezh a-benn ar fin, e krogjont da eskemm e brezhoneg gant an dud a oa o chom aze. Ha diouzhtu evezh, divskouarn tanav o selaou ha c'hoant kemer perzh a-zevri a-berzh an arvesterien. Aze eo bet kompenet ganto pegen pouezus e c'halle bezañ ar brezhoneg, yezh-vamm an dud war an oad-se. Alies n'hall ket ar re gozh stummañ eñvorennoù nevez ha koulskoude e c'hallont komz eus an traoù koshañ o deus bevet.

Goude an tamm darvoud-mañ o deus divizet an Tontons Yoyo sevel 4 sketch brezhonek gant skoazell Kelc'h Sten Kidna an Alre a-benn frammañ un abadenn a bad 20 munut. Goude-se c'hoazh o deus desket lenn ha skrivañ brezhoneg e kreizenn Amzer Nevez e Plañvour. Abaoe e kemeront perzh gant o brezhoneg Gwened e darvoudoù sevenadurel bro an Alre aozet gant ar C'helc'h Sten Kidna. Kinnig a reont o abadenn d'ar re gozh e-pad Filajoù bro Wened ha d'ar re yaouank er skolioù, da-geñver ar skrivadeg pe c'hoazh pa vez gouel ar brezhoneg e Lokoal.

## 1 - Ar Redadeg

Fellout a rae da aozerien ar Redadeg aozañ un darvoud plijus a sikourfe evit reiñ nerzh d'ar brezhoneg er gevredigezh en-dro, un darvoud a badfe pelloc'h eget just an amzer ma pad ur gouel, un darvoud a c'hoarvezfe e brezhoneg eus an eil penn d'egile, un darvoud poblek a vodfe kozh ha yaouank, erfin un darvoud a c'hoarvezfe e pep lec'h e Breizh rak e pep lec'h ez eus brezhonegerien pe tud kar-o-yezh o chom ha pa ne vefent ket gwelet war ar pemdez kement-se. Neuze ez eus bet soñjet d'an aozerien e vije brav degas da Vreizh mennozh ar C'horrika, ur redadeg evit an euskareg hag a vod kantmiliadoù a dud en Euskadi abaoe ouzhpenn 20 vloaz. Ha setu ma voe aozet ur veaj eno evit gwelet penaos e c'hoarveze an traoù, studiañ ar rediennoù e-keñver surentez ha kement zo. A-benn ar fin, bep un tammig eo bet lañset an afer oc'h en em harpañ war poellgorioù skoazell lec'hel hag ur redadeg 600 kilometr zo bet ijinet. Loc'het eo eus Naoned da hanternoz ha miliadoù a dud zo bet o redek a bep eil a-raok en em gavout e Karaez e-kerzh gouel bras 30 vloaz Diwan. Tri devezh-pad eo bet an dud o redek ha bep kilometr e veze treuzkaset ar vazh-test, arouez ar brezhoneg d'ur reder all bet prenet ur c'hilometr gantañ evit kaout ar gwir da dreuzkas ar vazh d'e dro. Un darvoud sportel hep e bar redet noz-deiz dindan ar seizh avel n'eus bet troc'h ebet dezhañ hed-ha-hed c'hwech-kant kilometr. Ur pezh darvoud en deus lakaet miliadoù a Vretoned d'en em unaniñ en-dro d'o yezh hag en deus roet nerzh ha startijenn d'an holl en ur lakaat ar brezhoneg war wel en un doare plijus-kenañ. Dre ur c'henlabour gant ar bed ekonomikel en deus talvezet an darvoud da zastum ur sammad brav a arc'hant a servijo evit diorren ar c'helenn brezhonek er vro .